




Ardamezou on Aotrou 'n Eskob FAVE

Savet int bet gand an Tad Corre, manah e Abati Solesmes. —
 "NI HO SALUD LEUN A HRAS" a lavar eo bet sakret an Ao 'n Eskob
 FAVE e bloavez an Itron Varia, kant vloaz goude m'en em ziskouezas
 ar Werhez e Lourdes, ha da gantved bloavez kurunidigez Itron Varia
 Rumengol.

BLEUN-BRUG

Niv. 108 (Mizieg-Mensuel)
 Koumanant - Abonnement : 500 fr.

C'HEVRER-MEURZ 1958

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur koum. a enor — 1.000 lur koum. madoberour) da :

**Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.
C. C. P. 1541.90 Nantes.**

Kas ar skridou da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).

Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.

C. C. P. 544.22 Nantes

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

1858-1958, gand L. B.	1
Mari-Beg-an-Diaoul, gand J. Noel	2
P'em gwelez, gand Loeiz Herrieu	10
Kantik d'an Itron Varia Bodonou, gand L. Lok	11
Al loariou nevez, gand J. Tricoire	12
Ar votadeg gand ar gwenan, gand Arzel Gervorvan	14
Keleier	16

Bleun-Brugou 1958

E 1958 a vezo greet ar Bleun-Brug :

- 1) **E PONT'N-ABAD** d'an 22 a viz **MEZEVEN** en enor d'an Itron Varia. (Bleun-Brug Kerne.)
- 2) **E SANT-THEGONNEC** d'an 20 a viz **GOUERE** en enor d'or Halvariou koz. (Bleun-Brug Léon.)
- 3) **E NOAL-PONDI** d'ar 13 a viz **GOUERE** en enor da Zantezed Breiz. (Bleun-Brug Bro-Wened.)

Mall eo dija lakaad ar vugale da zeski o hanaouennou hag o displegadennou evid ar henstrivadegou. — Goulennit diganeom evito, levrig ar konhouriou. Kaset e vezo deoh evid eun timbr a 20 lur. (Skriva da : V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Fin.)

Deut eo er-mêz niverenn 5 « Les Cahiers du Bleun-Brug ». Ar houmanant da « Bleun-Brug » ne dalv ket evid reseo « Les Cahiers du Bleun-Brug ». Evid o haoud, skriva da : Jean Cormerais, Professeur au Lycée de Garçons, Rennes. C.C.P. 77.60 Rennes.

Koumanant-bloaz : 200 lur.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan.
QUIMPER, IMPR. CORNOUAILLAISE — C.P.P.P. N° 21697



133857

1858 - 1958

A-hed ar wech, kleñved braz an den a zo bet an ourgouilh. E galon a gar fouge ! Gwasoh, en e 'follentez, e teu da houeza, d'en em zével, beteg kredi eo e vestr dezañ e-unan... ha n'e-neus kont ebed da renta d'e Grouer !

E hanter an 19 ved kanved, evel hirio an deiz, oa stank an doktored, ne raent ket a henou bihan evid lavared oa echu piz he amzer, gand ar relijion ! « Ezomm ebed mui, emezo, euz a Zoue, euz artiklou ar Gredo, euz ar baradoz. An deskadurez eo ar relijion nevez. Ganti eo ema alhouez an eureded da zond... »

Hag an dud a jome estlammet dirag an heñchou-houarn kenta, dirag ar mekanikou dre dan, a beb seurt, ar telegraf, ar telefon, a oa o vond da jeñch doare d'o buhez...

Hag ez ea d'ar mare-ze, m'edod atapiet-oll, gand traou ar bed-mañ, pa ne zoñje ar re vraz nemed maga o spered gand sorhennou goulo ar falz doktored, eo e tiskenn an Itron Varia, Rouanez an neñv, da rei dezo eur gentel a 'feiz hag a izelegez a galon, du-hont, e kêrig Lourd ! Pa ne oa, e peb lec'h, nemed meuleudi evid an deskadurez, e teu da zibab evid beza he hannadez « Bernadett Soubirous » eur plahig a zaouzeg pe drizeg vloaz, ha ne ouie na lenn na skriva.

Pa ne oa istim, nemed evid ar re binvidig, Mamm Doue a daol he zell war paourra familh a oa er vro, war an hini ar muia disprijet, abalamour d'he 'faourentez !

Pa ne glaske aotrouien Pariz, war zigarez kreski an deskadurez, nemed moug a yez ar poblou bihan, ar Werhez a gomz ouz he mignonezig, e langach he bro, langach he zad hag he mamm, langach he halon !

Na pegen disheñvel eo heñchou an neñv diouz re an douar !

Furentez ar bed-mañ a zo follentez evid Doue ! An Aviel ne jeñch kêt ! Doue a blij dezañ diskar ar re a zo kreñv ha savet uhel, gand tud tud izel ha dister.

Merk Doue eo, pa e-neus eur gefridi bennag da ober war an douar, pa fell dezañ savetei rumm pe rumm euz an dud, en em zervichoud euz ar pezh n'eo nemed sempladurez.

Evelse e-neus greet en amzer goz, a-dreuz istor an Iliz, evel-se eo falvezet gantañ ober e Lourd, dre an Itron Varia.

Ha seul zisterroh eo bet ar benveg, seul wasoh ez eus bet enebet outañ, seul nerzusoh eo bet ar gentel roet d'an dud !

Kerreg Masabiel a zo deuet da veza menez gloar an Itron Varia, an tour-tan skedusa a zilvidigez, o para a-us d'or bed paour !

Ar pezh a ra gwir dalvoudegez an den n'eo nag e reñk, nag e spered, nag e zanzev... med ar galon eun ha didroidell a zo en e greiz :

« Mil meuleudi deoh, a Tad, Mestr an neñv hag an douar, da veza kuzet an traou-ze ouz an dud vraz ha da veza o dizoloet d'ar re vihan... ».

L. B.

Mari-Beg-an-Diaoul

PEZ C'HOARI EN DIOU DOLENN

gand an Ao Joseph Noel (Mab Noni) Person Plonevez-Kintin

C'HOARIEREZED : *Mari, Fanchon, Filo Goz, Filo Vihan* ha *Vovon* he *merhed*,
Vovon, Loëzaig (wardro daouzeg vla), *Anna* merh da *Vari*.

KENTA TOLENN (*E ti Mari*)

DIVIZ I : MARI ha FANCHON

MARI. — N'ho-poa ket klevet an dra-ze ? Beh em eus o kredi ahanoh.

FANCHON. — (o serri an dilhad du) Ken gwir evel emañ dirazoh ha koulskoude
me a vez eno beb gwener oh ober krampouez, evel e teuan amañ, beb lun,
da ganna.

MARI. — Fanchon. Etre ar foenn hag an eost e vo eured Per Vernig ha Filo
Bourle. Souezet on n'o-deus ket goulennet ahanoh da zikour !

FANCHON. — Evit hoaz, bepred, n'o-deus laret netra. E Kerpendu e vo ar pred ?

MARI. — Petra laret, Fanchon baour, petra laret ? E Kerpendu sklêr eo goùd.
Mervel a rafe Filo goz gand an dispiljadur ma vefe grêt an traou e Keroter.
Eur plah a don, eun debrêrez mel evel m'eo honnez !

FANCHON. — (O tiskouez eun hiviz toull.) An hiviz-mañ e vo laket ive ?
Freuget eo ken na dalvez ket ar boan koll amzer ganti.

MARI. — Penselet eo bet, ouspenn eur wech. Laket hi bepred. Kavet e vo da
zisklabeza an traou pe da rei d'ar pilhaouer, pa dremenno. Sellet 'ta ! N'eo
ket bet adkavet evid hoaz loerou nylon ma merh Anna. Aon em-eus e
vefent-êr gand Soaz.

FANCHON. — (N'eur hoarzin.) Ho, ho, ho, gand Soaz an ti-all ? Re goz eo honnez
da zougen seurt loereier ; hi o lakafe da zila kafe. Ouspenn da-ze, Soaz
evidon a zo eur plah a 'feson. Ugent vloaz 'zo e chomom chouk ha chouk,
ha biskoaz n'em-eus klevet an disterra droug diwar he houst.

MARI. — Paourkêz Fanchon ! Ez eo goùd na anavezet ket an dud ! Bizied
kromm he deus Soaz, bezit soñj. Galloud a ret henn dezrevel war va lerh.
Selaou, Fanchon, marteze e kredet eo pinvidig Filo-goz ?

FANCHON. — Penôz ? N'eo ket pinvidig Filo-goz ? He zi hag ho hini eo va
gwella re hag a-bell.

MARI. — Dre ma 'z eus voulouz mil ha daouzeg kant war he broz ha war he
jakedenn ? Dre ma pe ar bara benniget a-hed ar bloaz ? Feuket eo honnez,
mar plij, dre n'eo ket lakêt gand ar person da Vamm-baeronez ar Gonfir-
mation, N'eo ket gwir ar pezh a laran deoh ?

FANCHON. — Ya ! C'hoant he-devoa da veza anvet, ken na bade ket. Tri miz
'zo araog, he-devoa kaset eur jotenn d'an aotrou person evid-se : Hi he
unan he-devoa laret din : Eun dornad mad a arhant he-defe roet ouspenn,
rag goud a ran...

MARI. — Ha roet he defe. — Ya laouen, ha goude ma vefe bet red dezi ampresta
an arhant. Ya, Fanchon. O vond d'henn lared deoh e oan, Filo-goz a zo
leun a zle ken ne oar ken e peleh mond. Nouet eo bet evel a vez lavaret,
meur a wech. — Din me bepred... miret-se evidoh... e tle pevar mil lur.
Skuiz on o rei marhadourez war dermen « Mè bèo goude » a vez lavaret
din beb töl. « Warlerh n'arru ket huan. Ar wech kenta ma tevio hoaz me
'gred awalh e vo lakêt er porz. Ne rafeh ket kemend-all, c'hwi, Fanchon ?

FANCHON. — (O selaou.) Hi eo. Evuruz on ema Anna en ti, rag heugi 'ran ha
dislonk am-eus o weled Filo.

DIVIZ II : MARI, FANCHON, ANNA

ANNA. — Mamm Filo-goz Kerpendu a 'zo arru da zigas eur jotenn. Ne 'fell ket
dezi dond er zal, lavaret dezi dond, Mamm.

MARI. — (Goude beza grêt selladou ouz he merh.) C'hwi 'zo aze Filo ? Deut tre ;
petra ? Hirio 'z eus ardou ganeoh, avâd. N'eus nemed Fanchon ganin, ha
hoaz ema grêt he zamm ganti, da vond d'ar ster.

DIVIZ III : FILO ouspenn

FILO-goz. — N'am eus ket amzer, Mari.

ANNA. — (O vouta Filo.) Et ebarz 'ta. Ha ! ha ! Bremañ a vo réd deoh chom.
Azezet.

FILO-goz. — C'hwi 'zo amañ ive, Fanchon ! Fanchon amañ a vez bepred el
labour.

FANCHON. — Réd-mad eo din poania, pegwir n'am eus nemed va gonidegez ;
ma hini koz a zo brevet gand ar boan izili, teir zunvez tostig.

MARI ha FANCHON. — (War eun dro.) Doue hag ar Werhez da rei gwelloc'h
yehed dezañ, Anna, ma merhig, zikouret Fanchon da zamma he beh ha roet
soavon dezi, euz hini « Crio » gouzoud a rit.

FANCHON. — Bennoz Doue deoh, Anna. Pa deoh da zigas va mern din c'hwi a
zikouro ahanon da waska an dilhad, neketa ?

ANNA. — Ya, Fanchon.

FANCHON. — Kenavo, 'benn digwener, Filo.

FILO-goz. — Kenavo, Fanchon. Diwallet da jom heb dond, krampoez gwiniz
ho-pezo d'ober goude ar re gwiniz du, er wech-mañ. Klevet a rit ?

FANCHON. — Ya ! Ya ! ! (Mond 'ra Fanchon hag Anna er-mêz.)

DIVIZ IV : MARI ha FILO

FILO-goz. — Dond a reoh da dañva ar hrampoez, Mari ?

MARI. — Selaouet ? N'eo ket mouez ho merh Vovon a glever ? Hi eo (n'eur
vond beteg an nor). Deut amañ, Vovon. Ema Mamm amañ.

DIVIZ V : MARI, FILO-GOZ, VOVON

MARI. — (N'eur gregi e dorn Vovon.) Gweled a ret ho Mamm amañ ? Arabad
deoh kaoud aon. (Da Filo) Abaf eo Vovon, neketa ?

FILO-goz. — Eun tamm, ya, pa vez er-mêz. Ne lavarfeh ket kemend all, mar he
gwelfeh er gêr. Eun torr-penn nemed pa vez kouşket. (Da Vovon) Lakêt
mad ho peus lizer ho preur soudard er voest ? Braz awalh e oah ? Uhelig
eo an toull.

VOVON. — Ya, mam. Dor-logod a oa eno. Me 'm eus hen zavet, ha n'eur astenn
e vreh, e-neus lakêt al lizer en toull. Mamm, mond a ran da hoari gand
Loëzaig a zo en ti ?

FILO-goz. — Ne dalvez ket ar boan. Emaom o vond kuit dioustu. Dond a
reoh a-benn digwener, Mari ?

MARI. — Grêt eun ehan, neuze. Amzer ho peus michañs ? Anna, Anna, deut
amañ.

DIVIZ VI : (ANNA ouspenn)

ANNA. — Petra 'zo, Mamm ?

MARI. — Karget he 'faner da 'Filo — (da Filo) Petra a gemeret hirio Filo ?

FILO-goz. — Soavon, pér, daou bakad chik, ampez ; daou lur kafe glaz ; sukr,
pemp pakad m'ho peus, rag lavaret 'zo din ez ay war-rok. Grêt prim.

ANNA. — N'em em jalet ket. (Da Vovon). Deut da hoari gand Loëzaig.

MARI. — Ha roet eur vaz krioueg dezo o diou.

DIVIZ VII : MARI ha FILO-goz

MARI. — C'hoaz eur wech, Filo, azezet. Eur près direiz a zo warnoh hirio. Tañveet ar hrampoez-mañ. Eur banne gwin d'ober dezo diskenn - Me 'bari e ouian petra 'zo war ho spered-hag a ra deoh beza bervet o klask mond d'ar gêr. Komzet din euz ho merh. Na zislavaret-ket ahanon ! Hag hen n'eo ket krog ar big n'he skouarn ? Ema an traou o vond endro. Abaoe disadorn ema an dud o hortoz.

FILO. — N'eus netra grêt. Gwir eo e talh Pêr tost dezi. Skriva ra eul lizer beb eil devez ; dond a ra du-mañ da vutunad diou wech ar zizun. War baperiou va hini koz ema. Va merh zo troet gantañ. Feuka, gouela 'ra, pa alian anezi dâ hortoz, gand aon da gaoud keuz warlerh. Din-me e plij... etre an daou ! Gwelet e vo ; met, ma vez grêt diouzon, e vo tremenet kenta deiz ar bloaz, ken na vo grêt eured.

MARI. — Mad a ret dalea, mad a ret. C'hwi 'anavez an dud-se koulz ha me. N'eo ket e vefent tud divergont ; tud didrouz int, tud ha n'o-deus ket damant d'ho horv. Mond a reont d'an overenn heb sul ; med, siwaz ! tud tost, tud lôr.

FILO. — Lavaret e vez ez eus traou leiz ar prés (armel). Daou wiskamant he deus prenet abaoe ar brezel.

MARI. — N'eo ket diêz avad dezi serri traou. Ne roont ket boued d'an dud da zibri. Bet oh en o zi ? Neuze, ho-peus gwelet bara louedet, kig louedet war an dôl ha hoaz ne vez roet nemed diou wech ar zizun. Sellet, ez an da ziskleria eun dra deoh, dre ma 'z on douget evidoh, med miret anezañ evidoh : Janed ar Vernig a zo ribotéréz. Mar fell deoh gweled ho merh o ver-vel gand an naon, n'ho-peus nemed rei anezi da hennez.

FILO. — Eur ribotéréz ! Janed ? Kuit a 'farsal, Mari. Gwir eo ?

MARI. — Ken gwir evel emañ dirazoh. Va gouzoug da droha ma lavaran eur gaou ; mar ne gredet ket, goulennet ouz ar re a zo tost dezi : Soaz Lein ar Voten, Per Franzéz, hini goz Job ar Beuron. N'ho-peus ket klevet marteze eo bet gwreg Per Fransez o kana pouilh d'ezi hag ez eus bet chachadeg bleo. Honnez, Filo, he-devoa lampet war gwreg Per ha krabiset eun tu euz he fas, ken m'eo bet eur miz heb mond d'an overenn gand ar vez.

FILO. — N'am-oa klevet netra euz an oll draou-ze. Paneved deoh n'em-befe klevet grig. Mez, me 'jom amañ war gein an dud hag eo poent braz din mond d'ar gêr. Prest eo va 'faner ? Galvet Vovon !

MARI. — Amzer awalh ho-peus. Ema ho merh Filo er gêr, petra ? N'ho-peus ket daleet tamm hirio. Kemeret euz ar re-mañ. Eul lommig gwin hoaz ? N'ho-peus ket hen tañvét. Anna, Anna, deut !

FILO. — Trawalh em-eus bet evelse ! Savet e-neus d'am 'fenn, ken e welan ar meubl o tañsal ! Benn digwener e vin en gortoz d'ho kweled du-mañ.

MARI. — Mond a rin, Anna !

FILO. — Lavared a refeh d'am merh ar pez emaoch o paouez lavared din ?

MARI. — (N'eur skopa war he dorn.) Ra gouezo an ti warnon ma lavaran gevier.

FILO. — C'hwi a zigaso ampez ganeoh, digwener. Ne 'fell ket din mond d'eun ti all da brena.

MARI. — Bezet dineh. Med azezet. Amzer awalh ho po da bêa.

DIVIZ VIII : ANNA ouspenn

ANNA. — (Goustadig) Ema Janed ar Vernig en tu all.

MARI. — Piou ? piou ?

ANNA. — Janed ar Vernig a lavaran deoh.

FILO. — Ne 'fell ket din ken he gweled dirag va daoulagad. Hag hen he deus gweled va merh Vovon en ti ? Penôz ober ? Pegemend a dlean ?...

MARI. — Gortozet. Tremenet dre an nor-mañ a zigor war al liorz. Anna a lavaro goustadig da Vovon mond er-mêz gand ar baner hag en em gavo ho merh ganeoh e penn ar ru Gohig. C'hwi a bêo diwezatoh.

FILO-goz. — Ya ! kenavo digwener. Trugarez evid ar pez ho peus diskleriet din diwarbenn... (diskouez 'ra an ti) (Filo hag Anna a ya er-mêz).

DIVIZ IX : MARI he unan

MARI. — (A vouez huel.) Kenavo ! kenavo, aotrou person. Mond a rin benn disul ma ne vez ket re a dud — (tenna 'ra he zeod da Filo) (hag en eur zistrei). Janed ar Vernig, Janed, deut amañ. Pell zo n'am-eus ket ho kwelet. Eur gomz am-eus da lavared deoh.

DIVIZ X : MARI ha JANED

JANED. — (War doull an nor.) Devez mad deoh Mari. Petra 'peus da lavared din ?

MARI. — Deut tre ebarz, bepred. Yah oh hag ho tud ?

JANED. — Yah om dre hras Doue. C'hwi 'zo ive, hervez a welan. Med, me grede din e oa tud. N'eo ket gand an ôtrou person e komzeh ?

MARI. — Ya ! ema ar person o vond er-mêz. Bet eo o pedi ahanon d'am lein a-benn disul kenta. Med diêz e vo din mond, pegwir a vez leun-kouch ma zi goude an overenn-bred. Selaouet 'ta, goulennet e-neus ouzin... Med azezet arôg, ha na ret ket e-vettañ. N'e-neus ket prizet zoken tañvâ ar gwin dre ma 'z eus hini gwelloc'h er presbital, fe zur ! Ya goulennet e neus ouzin mar d'eo gwir e vo dimezet ho mab Per a-benn disadorn, rag en deiz-se ne vo ket er gêr.

JANED. — N'eo ket êz goûd, Mari. Per e-neus c'hoant da leusker. Eur bloaz hoaz a vefe mad dezañ, koulskoude, chom er gêr, rag neuze, e kavo eur 'feurm v Rao na re vraz na re vihan, eur plas euz an dibab da denna beg e spilhenn. Mar deo rêd, e vo lesket da vond, med krog a vo etrezom.

MARI. — Mad a ret, Janed, mad a ret. C'hwi 'zo eur plah a benn, rag, gand merh Filo-goz Kerpendu e tle mond, neketa ?

FILO-goz. — Evelse e vez lavaret. Goûd a ret an doareou.

MARI. — Mad a ret, Janed, hoaz eur wech. Filo hag he zud...

JANED. — Petra ? N'int ket tud a feson ?

MARI. — Evelse... Med, med, leun a zle.

JANED. — Leun a zle, hag ez eus diou goumanant war o ano ?

MARI. — War o ano, evel ma lavaret. Met digand piou o deus bet arhant d'o 'frena ? Din me bepred e tleont eun dornad. Ouspenn-ze, merh Filo-goz, Filo yaouank, evel ma lavarer, a zo brud fall warni.

JANED. — Ma, sellet pegen sod on-me ; kredi 'ree din e veze honnez er gêr, war ar pemdez ha d'ar zul, he ne veze ket o harrikotal er filajou.

MARI. — Kredit ahanon, Janed ; me a wel honnez stank er bourg, ha diwezad.

JANED. — Ma Doue benniget ! Grêt mad em eus dond beteg ho ti ! Bremañ e chomo Pêr ganeom. Ez an dioustu en hent. Daou pe dri garrad foenn a zo hoaz da zerri. Dua 'ra an amzer hag an avel a zo en traoñ.

MARI. — Jezuz, Mari, va zikouret ! Ober e ra eur gaouad ha va dilhad a zo ledet. Red eo din o zerri. Deut en ti, Janed. Anna a roio deoh ho traou, hag ho sikouro da zougen ho paner beteg Kroaz-hent ar Pouldu.

JANED. — Deom eta ha trugarez deoh hoaz eur wech.

EIL LODENN — (E ti Filo-goz.)

DIVIZ I : An diou FILO

FILO goz. — (Oh ober stamm da 'Filo yaouank o ouela.) Filo, va merh petra ? trawalh ho peus gouelet evelse. Amzer ho peus da zimezi. Eun all a deuo d'ho klask, gwelloh eged Pêr ar Vernig. Pa lavar ar wirionez, joa 'zo em halon o weled an traou evelse. N'em befe ket bevet êz war an douar-mañ o houzoud e vefeh bet maleüruz e ti ar Vernig.

FILO yaouank. — (N'eur skei war an dôl.) N'eo ket gwir ! Pêr hag e dud a zo tud vad. Amzer ho peus bet d'henn anaoud. P'e-nevez eun den eur stumm ha komzou seurt e re, ema sklêr eo eun den yaouank euz an dibab, evel ne gaver mui en deiz a hirio.

FILO goz. — Añzav a ran n'am eus netra da damall dezañ.

FILO yaouank. — Perag ho peus kredet traou fôz heb lavared piou e-neus o boutet ennoh ?

FILO goz. — Ma merh vihan, ebarz eun dra a bouez evel hemañ, ali an dud all eo mad e zelaou a-wechou. Eur wech ma vezer dimezet eo diwezad goude en em glemm.

Eul louzaouenn a zo er prad
a rer anezi huanad.

Dimezet hag ho po anezi
a lavare ar re goz.

Esoh dimezi
eged sevel ti.

Eun den yaouank ha pa zimez
a wel an aour e beg ar gwez

a lavarent hoaz. A hend-all, koll a rit hoh amzer o ouela pegwir eo difoel-tret an traou. Petra 'neus lakêd war e lizer ?

FILO yaouank. — Me oar me ? Lennit anezañ m'ho peus c'hoant da hoûd (stlapa 'ra al lizer gand ar vamm).

FILO goz. — (O lenn) « Tamallet ho peus din ha d'am zud ez om bleizi, en em vagon evel chas, ez eo va vamm ribotêrez. Gevier penn da benn ha deuet euz eur beg louz, beg an diaoul. Hag hen ho-peus klevet ahanon o lared an disterra komz eneb ho tud nag eneb deoh ? Ha koulskoude eo bet touet din eo karget ho tad a zle hag ez eus brud 'fall warnoh. Diwallet mad d'en em gaoud war va hent pe e kousto deoh rag me a hucho tra ma hallin. Emberr va vamm a gaso ho liziri deoh ha c'hwi a rento din ma re war ar memez tro. »

Setu eul lizer a lak fin d'an abadenn. Me a ziskouezo toull an nor da hennez, ma teu eur wech bennag war e giz.

FILO yaouank. — Perag ive alia ahanon da skriva koz komzou, n'o hredan ket ha n'o hredin biken. Nann, nann, nann (skei 'ra war an dôl). Sellet ma tigemeret fall e vamm p'en em gavo hirio ez in d'en em veuzi.

FILO goz. — Tatata. Tremén 'ra peb-tra ! Din me bepred ne vo ket lavaret : « Dreist moue ar gazeg, e kaver an ebeulez ». Tavet, tavet ! Benn kenta pardon Lokmaria c'hwi ray anaoudegez gand eun all, a zougo ken kaer ar « paraplu », a ouezo ober al lez evel Pêr.

FILO yaouank. — E-leh ober goap ahanon, e tlefeh diskleria ano ar beg fall e-neus livet ar gevier ho-peus lonket n'eur begad daoust dezo da veza brasoh eged an iliz.

FILO goz. — Mari Penglaou pegwir e fell deoh gouzoud. Dond a ra amañ, hirio, hag e klevoh ganti. He 'fedet em-eus da zibri krampoez gwiniz.

FILO yaouank. — Dond a ra ar pœzon-ze da zibri krampoez ? M'am befe gouezet kement-se em befe kuzet an astell da 'Fanchon. Med, ne zebro ket, laouen, rag ez an d'o stlapa e sailh ar moh.

FILO goz. — Nann, 'velkent krohenn a zo ahanoh ! Pehet e vefe dismantra krampoez ken kêr evel ma 'int.

FILO yaouank. — Eo ! eo ! henn ober a rin (sevel a ra).

FILO goz. — (En he zav ive) Gwelet e vo ha ne blegoh ket d'ho mamm. Pen-follet eo homañ, ma Doue, ma zikouret ! (eun tamm krog etrezo ha Filo yaouank er-mêz) Chomet amañ, chomet amañ, pe me a lavaro d'ho tad.

DIVIZ II : JANED ha FILO goz.

JANED. — (O tond en ti) Arsa ? amañ ema kont evel du-mañ, abaoe daou zevez 'zo ema du-mañ, evel eun ivern. Pêrig a vez fuloret pe vouzet. Deh a-greiz koan e-neus stlapet e skudell hag êt da gousked. Ne bader ket en ti. Setu perag ez on deuet beteg amañ da weled ha n'eus ket a leh da lakad an askorn 'n e blas.

FILO goz. — Va merh a oa troet rah gand ho mab.

JANED. — Nann muioh eged va mab gand ho merh.

FILO goz. — Ma hini koz ha me a oe prest da lezel Filo da zimezi d'ho mab, med bremañ...

JANED. — Bremañ petra ? An dra-ze em eus c'hoant da houzoud.

FILO goz. — Serret ho peg ha nebeutoh a droio.

JANED. — Pierig e-neus disklêriet din e-nefe grêt eun töl fall mar n'em-befe ket digaset ganin e liziri d'ho merh.

FILO goz. — Petra 'peus da lared euz va merh ?

JANED. — Netra n'em-eus nemed mël da rei dezi hag eüruz e vefen d'he haoud da verh-kaer.

FILO goz. — Brao eo deoh lared-ze, bremañ p'eo bet difammet ganeoh.

JANED. — Setu livet ganeoh eur pikol gaou. Galloud a ran azeza ? Dibunom ar gôz war he héd.

FILO goz. — Dibunom. N'ho peus ket douget ho mab da skriva d'am merh e oa brud fall o redez war he lerh ha ne ra nemed galoupad en noz ha hi, siriuiz benniget er gêr o hortoz Pêrig ha près warni d'achui he labour evid hen digemer gwelloh ?

JANED. — N'eo ket gwir... Me henn tou deoh, n'eo ket gwir.

FILO goz. — N'eo ket c'hwi ho-peus lavaret du-mañ ha du-hont em-eus eur bern dle ?

JANED. — Va gouzoug de droha m'am-eus brudet kemend-all.

FILO goz. — Ema lizer ho mab aze, hag e kredet dislavaret ?

JANED. — N'am-eus ket, hoaz eur wech !

FILO goz. — N'eo ket c'hwi ho peus aliet ho mab da skriva ar pezh a zo amañ ?

JANED. — Lavaret em-eus ar pezh am-eus klevet, pa lavar ar wirionez ! hag ho merh petra he-deus tamallet deom da genta ?

FILO goz. — Mad he-deus grêt.

JANED. — Mad he-deus grêt ? N'hellim ket en em glevet. Bremañ e welan ho-peus impentet se.

FILO goz. — Trugarez ! evid petra e kemeret ahanon ?

JANED. — Ha c'hwi ahanon-me ?

FILO goz. — Klevet em-eus gand re all hag e oa va dever kelenn va merh.

JANED. — Pegoulz ho-peus klevet kement-se ?

FILO goz. — Dilun ! ha c'hwi ?

JANED. — Dilun ive ; gand piou ?

FILO goz. — Ne lavar ket deoh.

JANED. — Hag e kredet kemend-all ?

FILO goz. — Ne lavar ket deoh.

JANED. — (n'he zav) Gweled a ran. Splann'vel an heol, n'am eus nemed eun dra d'ober : kemer toull an nor hag ober bêh d'am zreid. Ma, keuz am-eus.

FILo goz. — Keuz ! keuz ! ya, 'vel va hotez e lavaran-me ive.

JANED. — Ma n'am-befe ket keuz, ne vefen ket denet amañ, michañs, goude lizer diboell ho merh.

FILo goz. — Trugarez deoh, kiniterv ! ha lizer ho mab ?

JANED. — Piou e-neus kroget da genta ? Trawalh eo evelse. N'e-neus nemed peb hini mond gand e hent ha peoh neuze.

FILo goz. — Brao eo deoh lavared kement-se. Met pe vare e vo ankouët an tól-mañ gand va merh. Mar gallan da nebeuta, harz anezi da vond 'mêz ar vro.

JANED. — Med, hoaz eur wech, piou e-neus chouket traou ken louz en ho penn ?

FILo goz. — Ne lavaroh da zen ebed ?

JANED. — Sellet, evid diskouez peseurt poan a vamm am eus gand an dra-mañ me ziskleric an oll draou : digand Mari Penglaou am eus klevet. dilun.

FILo goz. — Dilun ?

DIVIZ III : (LOEZAIG ha VOVON o tont en ti)

VOVON. — Mamm, ema Mari Penglaou o sevel ar grapenn. Dre a dreuz e teu, n'eur heuilh ar wenojenn, neketa, Loezaig ?

LOEZAIG. — Ya hi eo gwir mad. Diouz he broz gwêr hag he manegou gwenn am eus anavezet anezi, ha diouz he mouez ive, rak komzet he-deus gand ar mevel braz, 'n eur dremen.

JANED. — Ez an kuit.

FILo goz. — Gortozet ! Gortozet ! (da Loezaig) Loezaig, dilun, goud a-walh a rît, p'edoh o hoari gand Vovon e ti Mari Penglaou, hag hen ho peus klevet anezi o tispenn Janed amañ ?

LOEZAIG. — Ya klevet am-eus : bleizi, tost, kig louedet, an dud o vervel gand an naon.

FILo goz. — Mad eo ! it Vovon it ive, Loezaig, da lavared da 'Filo dond amañ, ez eus gwall ezomm anezi.

VOVON. — Ya, mamm. Deut Loezaig (an diou vihan a ya er mêz).

DIVIZ IV

JANED. — Hastet founnuz rei eur respont d'am mab, rag ne jomin ket dirag ar beg louz-se. Diêz e vo din harz da rei koad dezi, ha da zisklêria meur a dra. Krog on da weled sklêr.

FILo goz. — Ha me ive. Chomet, chomet evid eur 'farz. Marteze n'ho po ket keuz. Ha neuze, re ziwezead emao. Arru eo.

/DIVIZ V : JANED, FILo goz, MARI

MARI. — (gwisket kaer gand tro ; eur baner ganti) Demad deoh Filo.

FILo goz. — Demad deoh Mari. Azezet d'ober eun diskuiz. Abaoe eun eur edon ouz ho kortoz. Roet ho paner din.

MARI. — Eun tropad mad a dud a oa du-mañ, hag Anna a zo êt da eured ar Vouster. Azeza a rin ? an hent a zo karget a zodellou ha pell eo dond da Gêrpendu.

FILo goz. — Pell ? Sonet e vez an eil zon, a-benn en em wiskan da vond d'an overenn, hag em bez amzer da lakâd va 'faner du-ze ha d'en em gavoud em 'flas, araog ma vez sonet an overenn.

MARI. — C'hwi 'zo reiz d'ober an hent.

FILo goz. — Da lared eo, c'hwi bourhizien, a zo tost d'an ofisou ha hoaz e vezet gand ar re ziweza, ya pa brizet dond a-hend-all, dibôt e teuet da weled hoh ostizien.

MARI. — Me 'zo deut amañ, hirio bepred. Ah ! Sellet 'ta, c'hwi zo aze Janed ne dôlen ket evez ouzoh.

JANED. — N'ho peus ket ezomm d'henn ober.

MARI. — Krog a refet ? Petra 'zo o hoari ganeoh ? Stad a zo ennoh dre m'ho-peus prenet daou blas (1) hag ema ho mab da zimezi ?

JANED. — N'eo ket gand hoh arhant eo, bepred, rag daoust din beza e ti eun all, a renkan kloza eur beg fall 'vel ho hini.

MARI. — Petra 'zo digouezet ganeoh, Janed baour ? Dilun...

JANED. — Janed baour ! Janed baour ! gret eur genou sukret, bremañ p'ho peus hadet an droug gand ho teod milliget. Petra ho-peus da lavared euz va mab heg euz va zud ?

MARI. — Netra Janed, netra.

DIVIZ VI : FILo yaouank, LOEZAIG ha VOVON

JANED. — N'ho peus lavaret netra da 'Filo dilun ?

MARI. — Nann droug ebed, ahanta Filo ?

FILo goz. — Hag e kredet ? hag e kredet ? Ma, krohenn 'zo ahano. Gortozet, ema ar vugale amañ. (da Vovon) N'ho-poa ket klevet Mari o lavared a oa tud ar Vernig bleizi tost, lôr, ken na roent ket boued da zibri, leiz ar hov ?

VOVON. — Eo mamm, rag digor e oa an nor.

FILo goz. — Ha c'hwi Loezaig, petra az-poa klevet ?

LOEZAIG. — E giz-se am-oa klevet ive.

MARI. — (kounnaret) Klouestre me ho kavo, Loezaig. Diwallet mad pa deo. d'am zi.

JANED. — N'ho-peus ket mêz d'en em gemer ouz ar vugale ? Me lavaro d'he zud, benn disul.

FILo yaouank. — (da Vari) Droug a zo ennoh, dre ne da ket Pêrig d'ober al lez d'Anna.

JANED. — Gwir mad e komz ar re goz : « Etre an dimezi hag an eured, e vez en diaoul o redeg ». Amañ, ne oe ket grêt an dimezi, mez grêt e vo warhoaz, 'vel e oe bet diferet da genta, ahanta Filo-Goz ?

FILo goz. — D'ar re yaouank eo bremañ da rei o gér diweza. Laret da Bêr ha d'e dad dond d'ober ar goulenn ha da zibri krampoez gwiniz.

MARI. — Me ne houllan ket o zañva bepred !

FILo yaouank. — Nann, rag ne vo ket roet deoh.

JANED. — Nann, 'velkent. Hag an dra-mañ a vo embannet. Me a zisklêrio ar pez he-doa lavaret war ho koust Filo, sellet ! hag e huche, dilun, edo ar person o vond ar mêz euz ar zal, ha c'hwi an hini oa Filo goz. Boud 'zo tud, memez tra, hag a oar liva eur gaou. Me 'zo sur e rofe ar person he 'fask d'an teod louz-mañ heb he hovesaad. N'eo ket Mari Penglaou e tlefe beza heh ano, mez Mari-beg-an-diaoul.

MARI. — Sellet, me ra ma... ahano. oll (mond a ra er mêz — heb he 'faner).

FILo goz. — Foei ! foei ! loen louz Mari-beg-an-diaoul !

HOLL. — Foei ! foei ! Mari-beg-an-diaoul, Mari-beg-an-diaoul (mond a reont war he lerh).

FILo yaouank. — ('n eur rei eun tól troad d'ar baner) Kaset ganeoh ho pane. brein, Mari-beg-an-diaoul !

AR RIDOCH A GOUENZ

(1) daou blas = diou goumanant.

P'em gwélez

P'em gwélez é tostâd,
Men dous,
E verù te zaoulagad
Glaz-rouz ;
Hag é kleñan é me halon
Un trouz,
Em goahiad e zasson
Ken dous...

P'em gwélez é toned,
Koantenn,
Ar te zivéz karek,
Abenn,
E tarh ur moushoarh gwiù ha flour ;
Neuzen
E vourr me hoanteu gour
Breskenn...

P'em gwélez é pellâd,
Plahig,
Chè beuet te lagad
Koantig ;
Ar te éné, chè melkoni !
Prestig
E sour ar me hani,
Ken tig.

Gwennhoarh te vég, gwiùded te sell
Ken gé,
En dar e strimp énoñ kent pell
Goudé ;
Ne oulan kén, é gwirioné,
Péhani aneñ
E bik me halon en donnañ :
Glahar pé leùéné ?...

D'en deu, koantig, é filiman,
Rag o-deu
Emant bleu
Te garanté...

Ar zonenn gaer-mañ a rolo d'on lennerien eun tañva euz kened leor Loeiz Herrieu
— Doue d'e bardono. Lakeet on-eus ivez ar memez sonenn e skritur K.L.T. da ziskouez
pegen tost ema bremañ ouz doare-skriva Gwened.

(1) ABENN : dioustu.
(2) NEUZEN : neuze.

P'am gwelez

P'am gwelez o tostâd,
Ma dous,
E verv da zaoulagad
Glaz-rouz ;
Hag e kleñan e ma halon
Eun trouz
Em gwazied e zasson
Ken dous...

P'am gwelez o toned,
Koantenn,
War da ziweuz karek,
Abenn (1),
E tarz eur mouse'hoarz beo ha flour ;
Neuzen (2)
E vourr ma hoantou gour
Breskenn...

P'am gwelez o pellâd,
Plahig,
Eo beuzet da lagad
Koantig ;
War da ene 'kouez melkoni.
Prestig
E lamm war ma hini,
Ken tig.

Mouse'hoarz da veg, beoder da zell
Ken gé,
An dael a darz ennañ kent pell
Goudé ;
Ne ouzon ken, e gwirioné,
Pehini aneze
A big ma labour an donnañ :
Glahar pé levene ?...

'N o-daou, koantig, e hufvreen,
Rag o-daou
Ez int bleuñ
Da garante...

(Troidigez K. I. T.)

L. Herrieu.

(Dasson ur galon, 1957.)

Kantig da Itron Varia Bodonou

E parrez Plouzane, kanton Lokournan-Leon

Ton ha Son: L. Lok

A-man a. ba oue kant-ve-jou Plouiz sa ne a. vi - lie-
rou di-rag ho skeudenn o. Ma. ri a deu gand fizians d'ho pe. di I-
tron Va. ri. a Bo. do-nou Se. la. ouit ouz. or pe. den-nou, La-
kit ho Mab Je. zuz on Aotrou da skuilh warnom. ni e - hra. sou

Diskan : Itron Varia Bodonou
Selaouit ouz or pedennou
Lakit ho Mab, Jezuz, on Aotrou
Da skuilh warnom-ni e hrasou.

Amañ, abaoe kantvejou
Plouiz-Sane, a vilierou,
Dirag ho skeudenn, o Mari,
A deu gand fiziañs d'ho pedi.

Rag morse ne 'z euz bet klevet
Ganeoh e ve bet dilezet
Neb a bedas, a greiz kalon
E chapel Bodonou, an Itron.

Ive parresioniz Guiler,
Lakourmaniz ha tud Kerber,
'Zo kizellet o anioù
War vein-marbr ouz ar mogerioù.

O Mari, mamm a drugarez,
Grit ma reno war or parrez
Feiz, esperañs ha karantez
'Vid ma vevim el levenez.

Ped kwech 'pad pevar bloaz brezel,
O deus pedet en ho chapel
E harz ho treid, Mamm a Druéz,
Da bellaad diouto peb enkrez ?

D'ho trugarekaad, o Gwerhez !
E lakaet ho chapel a nevez,
Ha keid ma chomo Bretoned
En he 'foull ne vo ket gwelet.

Er bloavezh 1957, chapel Itron-Varia Bodonou a zo bet adkempennet, renevezet, an
tour a zo bet adsavet, eur menhir, gerioù brezoneg koz outañ, a zo bet lakat en e zav,
eur groaz warnañ, e ball ar prosesionou ; peb tra endro d'ar japel beteg feunteun
ar Pardon a zo bet renket.

E koun an 8 a viz Gwengolo, ma oe gouelioù kaer en abeg da ze evid sikour paea
ar mizou bet ha da veza evid enori evelse ar Werhez Vari, eo bet savet ar hantig-mañ
kinniget d'an Aotr. Couloignier, person Plouzane, Sparfel, kure, Bleunven, person dean
kanton Lokournan-Leon, bet kure Plouzane.

L. L.

ar bed o vond en dro

al loariou - nevez

Peb hini a oar e oa kont gand an Amerikaned da lakaad eul loar-nevez da drei en dro d'an douar abaoe daou vloaz zo, hag eo ar Rused a zo deuet a-benn euz an taol kaer-ze da gentâ, tri miz zo dija.

Marteze n'eo ket re ziwezad ranna kaoz diwar benn kement-se, lennerien gér. Rag, traou zo ha n'int ket gwall sklêr hoaz evid meur a hini.

✱

Da genta, penaoz e hall trei ar seurt loariou-ze ?

Pa daolit eur mên kuit, hennez a gouez endro war an douar eun tammig pelloh, pezh a ziskouez ez eo sachet gand an douar. Koulskoude, seul vuannoh e taolit ho mên, seul belloh ez a da goueza.

Gand eur pezh kanol e haller teuler boledou beteg 10 pe 20 kilometr, kên fonnuz e teuont ér-mêz euz ar hanol.

Beteg ar brezel diweza, gand ar hanoliou eo e veze tennet ar pella. Da geñver fin ar brezel, avad, an Alamaned a oa deuet a-benn da denna kalz pelloh gand fuzéennou braz-meurbed. (Beteg neuze, ne oa nemed fuzéennou bihan, e-giz ar re a vez taolet én neh, d'ar 14 a viz Gouhere, da sklerijenna an oabl én enor d'ar Republik.)

Abaoe ar brezel, meur a vro o-deus klasket ijina fuzéennou o vond buannoh-buanna ha pelloh-pella. Fuzéennou gouest da vond beteg 5000 kilometr hag ouzpenn a zo bet ijinet da genta ér bloaz tremenet : ar rez-ze a hall mond euz an eil douar-braz d'egile (fusées intercontinentales). Evid mond kên pell-ze e tleont sevel uhel ive : pignad a reont beteg a-uz d'ar gwiskad ér a ra tro an douar.

Oh ober fuzéennou brasoh hoaz, eo posubl lakaad anezo da vond kên pell hag ober tro an douar : red eo dezo, avad, tizoud 8 kilometr ar zekondenn, kên e vez greet tro an douar ganto én eun eur hanter bennag ! Eur fuzéenn seurt-se, pe gentoh ar pezh a jomo pa vo laosket e govad poultr, a gendalho da drei di-hân én dro d'an douar. Rag, peogwir ez a buan a-walh evid ober an dro gentâ, e hallo kênkouz ober eun eil tro, gand ma ne gavo netra war heh hent da herzel anezi. Ha ne gavo netra war heh hent, peogwir ema o trei én tu all d'ar gwiskad ér (kên uhel ha tri hant hilometr a-uz d'on penn). Trei a raio eta en dro d'an douar, e-giz ma ra al loar heh-unan ; ha setu perag e vez anvet « loariou-nevez » ar boulou a vez lakeet da drei e-giz-se. Kalz bihannoh ha kalz tostoh d'an douar eo loariou an dud egéd an hini a sklerijenn ahanom diouz an noz. Hag eun tammig ér a jom hoaz e leh ma troont, o herzel anezo tamm-ha-tamm, kên e teuint da goll lâñs ha da adkoueza, a-benn ar fin, o teuzi dre 'frota war an ér, kên buan evel ma 'z eont.

Peb hini a oar eo bet lakeet e-barz al loariou-ze binviou (oustouilh) a beb seurt evid klask gouzoud, dre radio, peseurt amzer a zo du-hont. Hag e klasko an dud mond da vale e-barz ar re-ze, ha klask ive, diwezatoh, gand fuzéennou kreñfho hoaz, mond beteg al loar ha pelloh.

✱

Eul loar-nevez, eul LOARIGAN, eur spoutnik, pe eur SPONTIG ?

Peseurt ano rei d'eur seurt kavaden e brezoneg ? Eul loar-nevez ? Ya, sklêr eo. Med eun ano bravoh a zo red kavoud. Din-me e plijfe « loarigan » : Diou « loarigan » oh ober eun dañs-tro en dro d'an douar e-giz daou « gorri-gan ».

Med ar Vretoned n'o-deus ket klasket pemp troad d'ar maoud : « Spoutnik » a lavar ar Rused. « Spoutnik » ?... « spoutnik » ? o-deus respontet ar Vretoned. Setu a zo heñvel a-walh ouz « spontig »... Ya, eun dra da sponta an dud ha netra kên, setu aze ar wirionez !

Ma tlefe ar brezoneg lakaad ar Vretoned da gompren an traou nevez e giz-se penn-da-benn, da lavared eo, da sponta dirag peb tra nevez-kavet evel konifled (lâpined) aonig, e lavarfen diouztu : « ankouait buan ho prezoneg ! Ar poblou hag a naho mond war raog a vo lezet a gostez. Sponta dirag an araokadennoù a vefe eur vêz hag eun dra digristen ».

N'ho-peus ket klevet ar Pab, da geñver Nedeleg ? Ar gristenien, a lavare Pi XII, « a dlefe kompren ez eo eur vêz lezel enebourien an Aotrou Doue da « gaoud muioh a galon egéto evid labourad, evid ober traou nevez, ha zokén « evid ober sakrifisou ».

E gwirionez, an Aotrou Doue e-unan e-neus lavaret d'an dén, diouztu goude beza krouet anezañ : « kreskit ha stankeit ; leuniat an douar ha mestroniat anezañ » (ar Bibl).

Leunia an douar ha beza mestr warnañ, setu an tamm labour fiziet én dén gand Doue evid ar bed-mañ. Hag an Aotrou e-neus roet d'an dén eur spered lemm a-walh d'ober kemend-all. Ha pa vez an dén o fougeal, o kredi lavared eo deuet a-benn da veza kên kreñv hag an Aotrou Doue gand e ijinadennoù nevez, ne gompren ket ne ra kên nemed senti ouz Krouer ar Bed e-neus komandet dezañ mestronia an douar.

Leunia ha mestronia an douar a zo daou dra na heller ket ober an eil heb egile : an dud kenta o veva diwar 'frouez gouez ha loened ar hoajeier a 'felle dezo kaoud eun dachenn vraz-vraz (péder leo tro-dro, d'an nebeuta) evid dastum (serri) boued eun dén hebkén. D'ar mare-ze, hervez an dud desket, ne helle beva e-barz ar Frañs nemed 400 dén bennag, e leh e vev 40 million hizio an deiz, ha maget kalz gwelloc'h gand ar frouez hag al legumach euz an dibab a oar an dén gounid bremañ, sikouret gand ludu (engrais) a beb seurt ha gand mekanikou dispar. Ha n'eo ket echu kresk an dud, moarvad. An dud désket a lavar deom, dija, e hallor maga kalz muioh a dud hoaz, pa vo gouezet da vad gounid ar bézin-munud (algues microscopiques) o kreski e-barz an dour, hag a dalv, beteg bremañ, da vaga pesked ar mor. Mad ! pemp mil bloaz zo, e veve hoaz an dén diwar 'frouez ar hoajeier : heb koajou e kave d'an dén ne hallje ket chom beo ; ha koulskoude, evid maga muioh a dud, eo bet red diskara ar hoad-braz ha digeri parkeier ; ha bremañ eo krog ar parkeier da steuzia d'o zro dindan an tier hag an uzinou o stankaad : a-raog pell, e vo maget an dud gand bézinmunud ar moriou, piou oar ? Hag-eñ e-nije an Aotrou Doue goloet an tri hard euz an douar gand dour mor evid netra ?

Rag, peb tra a zo bet lakeet gand an Aotrou Doue evid ezommou (besoins) nevez an dén, dre ma vez red ober ganto : goude ar hoad, ar glaou-douar ; goude ar glaou-douar, ar petrol ; goude ar petrol, nerz an atom ; hag evid kas-dégas an nerz-se, an elektrisite. « Trugarekaom an Aotrou Doue e-neus roet nerziou « kuzet d'an traou, an dén o klask hag o tiskoachia anezo dre 'forz poania, hag « o lakaad anezo da labourad evitañ », eme on Tad Santel ar Pab da geñver digoradur radio-Vatican.

A-benn ar fin, pa welom an dén erru gouést (kapabl) da ober tro an douar én eun devez bennag gand eur harr-nij dre nerz-a-dreñv, da gomz euz an eil penn d'an douar d'egile gand ar radio, kên e oar diouztu peb hini ahanom ar pezh a zo o paouez degouezad e-barz ar bed a-bez, ha pa zoñjom e hallo bremaig an dén ober tro an douar én eun eurvez pe ziou war vourd eur « spontig » heb beza « spontet » an disterrâ, ha pa welom, ouzpenn-ze, e vez kavet boued fon-nusoh-fonnusâ dre ma kresk niver an dud, neuze e komprenom ema an dén o vond pelloh-pellâ war an hent mad e-barz ar bed-mañ, an hent merket dezañ gand an Aotrou Doue ér penn-kentâ : kreski ha stankaad ; leunia ha mestronia an douar.

D^r J. Tricoire.

Ar votadeg gand a gwenan

Anaoud a rit Kan-Abred?... Ne rit ket !... Mad, it da Bloubennag, hag e vo lavaret deoh n'eus ket er barrez kilhog ebed par da Gan-Abred. An dud a gav dudi o selled ouz e gribell ruz hag ouz e zê blu marellet a-dachadou du-glaou, a-dachadou ruz-gwad, a-dachadou all melen-aour. Ya, eur gwiskamant hag a lugern dindan an heol, me 'lavar deoh ! Hag evid ar han, gand eur gér e rin e veuleudi : eur blijadur eo beza dihunet gantañ da deir eur diouz ar mintin !

Med Kan-Abred ne ra ket kalz a van ouz meuleudi an dud. N'eo ket en e zilhag nag en e vouez e laka e 'fouge, en e veg ne lavaran ket... Eur beg hirroh eged hini ar hilheien all ? Tamm ebed !... Nag hirroh na bravoh ! Eun draig lemmoh marizeze...

Pa zoñjer ped gwenanenn a zo tremenet dija dre ar beg-se !... Rak n'eus roued orjal ebed da horren ar yer e ti Bêr ar Gall... setu ma hell ar hilhog ober al lez d'ar gwenan. Pebez chañs !... ha nag ez eo mad ar gwenan... blaz ar mel ganto !...

Med petra 'hoarvez hirio 'ta ? Sur a-walh e tle beza deiz e houel ! Rag ar gwenan a zeu oll er-mêz o hestou evid e zaludi... a-raog diskenn dre e veg en e gorzailhenn...

Kan-Abred n'eo bet biskoaz er skol o teski petra eo eun hed-gwenan. Bihanig e oa c'hoaz pa gollas e vamm, ha tra-walh e-neus bet o teski, diwar e goust e-unan, kana ha derhel urz e-touez ar yer.

Med desket e-neus ive labourad gand e veg ! Ha n'e-neus ket a goz. Pebez friko a ray hizio ! Hag e sank e veg er gwenan ! Hag e sank, hag e sank !... Hag e lonk, hag e lonk !... Teir, peder, pemp, seiz a-wechou gand an heveab taol-beg !

Med mar deo divorfil e veg, e skouarn a zo pounner. Ar wenanenn a ren al labour war-dro ar hoar, Lip-e-Labour heh ano, he-deus klevet safar an taoliou-beg. Diskennet eo d'an daou-lamm war dreuzou ar gest. Hag hi da youhal a-bouez-penn : « Peleh ema ho spered ganeoh, traou genaoueg ? Bremaig, ma ne zistroit ket da glask repu e-barz ar gest, e vezot lonket oll ! Deuit prim amañ, ma roin eun ali mad deoh ! »

Ar pezh a zo greet war an taol. Ken e chom Kan-Abred e veg gantañ... war greisteiz nemed kart ! Pounner eo e skouarn, a lavaren deoh...

E keid-se, Lip-e-Labour a youh, e diabarz ar gest, ar homzou brudet-mañ : « Selaouit ! Gouzoud a rit mad n'eus ket da hoari. Re enk eo ar gest evidom oll. Hizio e ranko beza gouel-mikêl gand ar re yaouanka... pe gouel an Anaon, ma ne zeuit ket a-benn euz ar hilhog daonet-se ! » Ar pezh a oe lavaret da houde n'eo ket bet skrivet e Istor Rouantelez ar Gwenan...

N'eus forz penaoz, n'eo ket re hir an dale. Ha Kan-Abred a zo laouennoh eged biskoaz e veg, pa wel ar gwenan adarre o tond oll er-mêz, re goz ha re yaouank.

Ha taol-beg a-zehou, taol-bez a-gleiz !... ma 'z eo eun dudi !... Med n'eo ket bet diskennet c'hoaz en e gorzailhenn an deg gwenanenn bennag e-neus lonket, pa zant dre douez e blu mil flemmadenn dan hag a laka e wad da vervi... Sourral a ra en-dro d'e benn ar gwenan a-viliadou. Dallet ha mil-hloazet eo dija ganto, pa glev, en eun taol, mouez skiltruz Lip-e-Labour o youhal : « D'an ti-kêr ! D'an ti-kêr ! Votit evitañ ! Votit evitañ !... »

Kan-Abred n'e oar mui pe du trei. Lammad a ra e-kreiz an hent braz. Hag eñ da redeg, da redeg... Med nag e kast ar gwenan, nag e kastront yud, dre zindan e ziouskell dispaket...

O ! setu pelloh eun nor digor frank dirazañ... dor an ti-kêr ! Eul lamm e-barz... ema saveteet ! Siwaz !!! ar gwenan a ziroll a-verniou war e lerh. Hag e klevet mouez an Aotrou Mêr o lavared e-kreiz ar cholori : « Saig ! Digor 'ta buan ar prenest, pe emaom oll kastret bremaig ! » Hag en eul luhedenn, setu ar huzul ti-kêr er-mêz dre ar prenest ! Eun taol-skub, ma oe biskoaz unan !...

Kan-Abred, eur wech lammet war an daol, a oa chomet semplet, e-touez ar paperiou. Pa zeuas ennañ e-unan, ar gwenan a oa nijet kuit, o soñjal moarvad e oa maro.

Neuze, e-kreiz e derzienn, Kan-Abred a gomprenas e-noa an enor da veza mêt Ploubennag...

Kompren a reas ive penaoz e-noa ar gwenan votet evitañ... Hag e oe mall gantañ lakaad e skrabadenn genta war gajer ar huzuliadegou : « Kan-Abred, Mêt Ploubennag. »

Med a-veh echu gantañ e lizerenn ziweza, e kouezas maro-mik. Votadeg ar gwenan a oa bet re nerzuz evid e yhed...

Setu aze, kontet din gand unan euz pennou-braz Ploubennag, penaoz e klas-kas Pêr ar Gall, gand harp e wenan, rei d'e barrez eur mêt nevez...

Arzel Gervorvan.



daou leor galleg da brena

levriou nevez :

MUR DE BRETAGNE ET SA RÉGION, gand or mignon E. LE BARZIC.

Levr kaer a 400 pajenn, ennañ eur rakskrid gand an **Ao. Falc'hun**. Her goulenn digand an oberour, 26, av. Cimetière de l'Est, Rennes.



LES DEUX AMOURS DE BRIZEUX, gand Job DE ROINCE.

Da geñver kantved deiz-ha-bloaz maro Brizeug hag a vo lidet war an ton braz en Oriant, en Arzano hag e Guillegomarh, e-neus diskouezet Job de Roince pegen don e oa karantez Vreiz e kalon barz brudet « **Marie** ».

Goulennit al levrig-mañ digand an oberour : Job DE ROINCE, 50, avenue du Mail, Rennes. C.C.P. 76.995. Priz al leor : 290 lur franco.

KELEIER

Goude abadenn skol Lilia.

Eur paotr a yeas da gaoud an Ao. Renner :
— Perag 'ta n'eus ket bet goulennet 50 lur diganeom, evid ad sinema-mañ ?
— Perag ? ablamour ma oa evid netra.
— Feiz, avad ! me a vije bet kontant da rei hanter kant lur, rag eun tamm brao muioh e plij din an dra-mañ eged ar « cinéma scolaire ».

....

Er memez leh, da gloza an abadenn, sekretour ar Bleun-Brug a lavaras d'ar vugale :

— « Kenavo ha bennoz Doue deoh ! »
Ha kerkent, ken brao ha tra, eur paotrig a respontas a vouez krefiv :
— Ha deoh ive !!

Diskou breizeg.

Deuet ez eus betek ennom, eun disk all, savet gand kanerien Landi, gand eur haier adarre ouz e heul, a vo kavet ennañ komzou ha ton ar hanaouennou. Eun eil disk a vent braz eo, an hini gwella bet savet betek-henn. War eun tu e kaver 5 kanaouenn : **Ar galv, Kendalhom, Alan al Louarn, Pe trouz, Kenavo** — war en tu all 5 kantik : **Spered Santel, Eun Doue a zeu d'ho kervel, Gwir vugale ar Werhez, O nag hir eo an noz.** Da heul, ograou gand an Ao. Abjean.

Evid deski kana kantikou, netra gwelloh.

Goulenn an disk (Voxigrave, n° 910, 33 tours) digand an Ao. R. Abjean, vicaire, Landivisiau, Fin.

Peziou-c'hoari brezoneg.

Da geñver Nedeleg e houzom ez eus bet roet pezioù brezoneg gand skoliou Plogastel-St-Jermen ha Leskonil.

Allez-aliez, e meur a barrez, e vez laket ar vugale a zo bet priziet er Bleun-Brug da rei o hanaouennou, pe o displegadennou. Ar re vianna, eveljust, a vez atao ar plijusa.

Strolladoù Lanniliz ha Plougerne, a yelo, dizale, da rei abadennoù brezonek dre ar parrezioù diwar ar miz.

Kanou santel.

Ar Bleun-Brug a zo o nevez digeri eun hent all. War e houlenn ez eo bet deuet, e-kerz miz Kerzu, Laz-Kana Landi, da rei **kanou santel**, e iliz Sant Varzin Brest. Daoust d'ar yenijenn ha d'ar hleñved eo deuet an taol da vad. Leun a oa an iliz. El lodenn genta e oa kanou oberourien veur a beb bro. En eil, kantikou brezonek, peder mouez. Al lodenn-mañ eo he-deus skoet ar muia an ilizad tud. Gwellet eo bet splann e hell or zonèrèz breizeg beza lakeet keñver-ha-keñver gand sonèrèz vraz ar béd. An Ao. Pondaven, ograouer Kemper, e-neus roet war an ograou, être ar hantikou, toniou breizeg ha toniou a ziavéz, evid dudi an oll. — Eur wech muioh e heller meuli **Kanerien Bro-Leon** evid al labour dispar a reont, dindan renadur an Ao. Abjean.

Abadennoù all heñvel a vo roet e Brest, Montroulez, Kastell ha Kemper.

Ar Bleun-Brug hag ar skoliou.

An Ao. Visant Seite e-neus gwelet, nevez 'zo, skoliou Lanniliz, Landeda, Lilla, Plouvien, ar Folgoad : eiz abadenn-skol a zo bet roet en oll. Roet e-neus ouspenn eur gaozeadenn gand luhskeudennou e patronaj Lanniliz, dirag eur zal leun a dud. Gwerzet e-neus, e-doug eur zizun, evid 21.000 lur a levriou.

Ouspenn, pedet e-noa kelennerien ha kelennered bro Plougerne d'en em gavoud eno, diriaou 16 a viz Genver, da 14 h. 30 : 38 skol a oa bet pedet, 30 a zo bet deuet. En oll, 70 a dud, leanezed dreist-oll. Plijuz tre eo bet ar vodadenn : kaozeadennoù gand an aotrounez **Job Seite** diwar benn Bleun-Brug 1958, **J. Le Barz**, diwar-benn e **Jeu scénique, Gwionwarc'h**, rener-skol er Grouaneg, diwar-benn talvoudegezh kulturel kenstrivadegoù ar Bleun-Brug ; gand an Tad **Laurent** war an doare da gana mad e brezoneg, ha gand an Ao. **Seite** e-unan diwar-benn an emzao breizeg a-vre-mañ, ha devez « éliminatoire » Plougerne d'an 11 a viz Mae 1958. Devez talvouduz braz ha plijuz kenañ : eun taol-êsa all deuet da vad ; dervezioù evel-se a vo greet c'hoaz e Lokournan ha Kleder.

Bodadenn Kuzul Bleun-Brug Leon.

D'ar 16 a viz Genver, diouz an noz, eo bet dalhet bodadeg komite Bleun-Brug Leon e Gwernou. Digemer dreist digand an Aotrou **Gourmelon**. Bodadenn vad kenañ : an oll a-unan. Ar vodadenn a oa renet gand an Ao. **Mocaer**. Bez 'ez edo eno : **Mocaer, Kermorgant, Pochat, Brisson, Potin, ar Barz, Jannès, Bodenez, Le Briz, Job Seite, Flantez, Fave, Gourmelon, Gwionwarc'h**, an Itron **Barz**. An oll bodadegoù da zond a vo greet er memez leh, gand eur banne traoù tomm evid echui. **Jean Le Barz** a zo bet anvet da iz-rener, ha da rener, pa n'hell mui an **D^r Dujardin**. An **A. Gourmelon** a zo bet anvet ivez da aluzenner skoazell.

EUL LEOR NEVEZ

V. Séité ha L. Stéphan, DESKOM BREZONEG
Emgleo Breiz, 1957, 206 pajenn

Bugale Vreiz a labour niverusoh-niverusa war danvez kofkourioù ar Bleun-Brug. Ouspenn 15.000 levrig a zo bet ingalet etrezo betek-henn. Eur gwir skol vrezoneg, avad, a rank ober hag a ra gand estreged levriouigoù bihan. Setu perag eo diviet bremañ an tri leor da zeski brezoneg bet savet gand an Aotrounez **Séité, Uguen** ha **Stéphan** : 37.000 anezo a zo bet gwerzet e-pad ar 15 vloaz diweza. Ne gav ket deom e vefe muioh a glask war leor brezoneg ebet eged war re an tri 'frer-ze, hag a labour ken stard evid or yez. N'eo ket eta fiziañs ar vistri hag ar mestrezed-skol eo a vanko da leor nevez an Aotrounez **Séité** ha **Stéphan**, DESKOM BREZONEG. N'eo ket ar skiant-prena kennebend all eo e-neus greet diouer d'an daou aozer. War wellaad atao ez a o labour e gwirionez, ha deut eo DESKOM BREZONEG da veza an dudiusa benveg bet lakeet bis-koaz etre daouarn on bugale d'o zikour da zeski mad yez o havell.

Kenta perz-mad DESKOM BREZONEG, an hini a denn dioustu evez an daoulagad, eo sklêrder ar hentelioù : eur skeudenn vraz da genta — diwar dorn P. Peron — eur pennad-skrid èz da lenn diwar-benn ar skeudenn-ze, goulennou diwar benn ar menozioù hag ar yez, ha setu echu pajenn genta peb kentel. An eil pajenn a zo gouestlet d'ar gerioù, hag an drede pajenn d'ar yezadur. Ar bederved, avad, a studi piz ar verb, heb mond re vuan gand eun danvez a zo ennañ ijin gwirion ar brezoneg. Poelladennoù e-leiz a vo kavet ivez e traoñ an notennoù yezadur. Taolenn evez ouz ar zoursi o deus bet an aozerien da rei d'o skolidi eul leor nèt ha sklêr : morse ne vo kavet e penn eur bajenn nevez kendalh an diskleriadurioù roet er bajenn a-raog : eur hammed braz a zo bet greet eta abaoe Yez HON TADOU, a oa urziet e gentelioù, a-wechou, en eun doare dispis a-wall.

En eur lakaad ar pennad-skrid brezoneg da genta hag an diskleriadurioù da houde o-deus soñjet an aozerien en doareoù nevez da gelenn ar yezou. Ar goulennou diwar-benn peb pennad a dalvezo ivez d'ar vistri da zevel kaozeadennoù brezoneg a-zivoud ar pennad, ar pez a houlenn er B.E.P.C. hag er bachelouriez. Setu eta eul leor o klota war eun dro ouz reolennoù an deskadurezh hag ouz ezommoù an arnodennoù.

Al lennadurioù kaer a gaver war leri ar hentelioù a hello beza kemeret da zanvez arnodennoù hag a roio d'ar skolidi eun tañva euz penn-oberennoù on lennegezh.

An taolennoù a gaver e dibenn al leor a ra anezañ ar yezadur berr ha klok a oa diant e-touez leorioù-skol bet implijet bete vremañ.

Ker eo bet koustet DESKOM BREZONEG. An oll vrezonegerien a gompreno n'eus ket gwelloh doare da ziskouez o anaoudegezh-vad d'an Aotrounez **Séité** ha **Stéphan** eged prena hag implijoud al leor kaer o-deus poaniet warnañ hag o-deus sikouret paea diwar o yalhig treud.




Photo LE STIR - Lesneven

Kant vloaz a zo abaoe m'eo bet kurunet Itron Varia Rumengol